

848 A d



KLOAREK KOAT AR RANNOU

HA

PENN-HEREZ KERZANTON



War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia Remengol.*

Karantez ha glac'har !!!

I

Tud iaouank a Vreiz-Izel, didoztait da glevet
Ar recit euz va dañlou ha va foanion kalet :
Me zo eur c'hloarek iaouank a eskopti Kemper
Am boa choazet eur vestrez enn eskopti Treguer.



E c'harz ar mor oun ganet e bro sant Gwenole,
Ha biskoaz nemet glac'har n'em euz bet em bue :
Glac'har a guir garantez, setu va flaneden,
Planeden rust ha kalet da heulia penn-da-benn.

Pa oan em bugaleach va mamm baour aliez
A lavare din : « Va mab, kar ha ped ar Werc'hez,
» Ped anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
» Mar ge fedez a galon, biken ne di da goll. »

Patronez va mamm dener, Gwerc'hez vad Remengol,
Pet gweac'h oc'h euz-hu miret na doun me eat da goll!...
Ho pedet am euz bepret... breman arok mervel,
E kanian ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II

Pa gimiadiz dioc'h va zud, pa ziz pell euz ar ger,
Evit mont war ar studi e skolach Landreguer,
N'em boa nemet pemzek vloa, me a wele dourek,
Rag evidon ne oa ken, allaz ! a eurustet !...

OR. 848A 1d

K 10

O tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik,
 Koant vel eun eik Bone, he hanv oa Metik,
 D'ar gouent e zea ive, evel d'oun d'ar studi,
 He c'halonik oa maniret kement ha va hini.

- Salud deoc'h, plac'hik iaouank, a lavariz dez-hi,
- Evel d'oun oc'h ankeniet o kuitad tud ho ti;
- Ho ternik flour eo domik lakit gant karantez,
- Hag e vezimp eur soc'h o well assentiez.

Ar plac'hik a lavaraz : « O kloarek Gwenole,

- Pedomp Doue aliez arn eil' vit e guile;
- Er joa koulz bag en anken dale'hit sonj a Vetik,
- Euz a vremauda viken e no ho mestrazik,
- — O Metik, va c'harante, rozen gaer Breiz-Izel!
- War ho mignon Gwenole tofit breman eur zell,
- Eur zell digant ho lagad a rai va eunsted
- Keit a ma lezo Doue ac'hanon war ar bed. »

Erru e kaer Landreguer, erru e penn hon hent,
 Me ce kassel d'ar skolach, ha Metik d'ar gouent :
 Ann disparti oc kalet, c'liuero hag ankennoz ;
 Ann eunsted er bed-man, stouaz ! n'eo ket padaz !

'Tre ma chomiz er skolach, skeuden dous Metik kez
 Enn deiz, enn noz dirazon a gene a liez.
 Neuze e peden Doue ha Sent koz Breiz-Izel
 'Vit ma vije he bue, laouen, euraz, santel.

III

Pa oc' echu va studi ez iz di Remengol
 Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad Remed-ott,
 Seiz tro a riz d'au aoler, devez ar pardon braz,
 Ha seiz tro d'ar inz-sakr war benn va daoulinsaoazet
 Goude ann oferen bred, o pebeuz levenez !
 Er vered, gand he mamm ger, e velis Metik kez
 Laouen oa evel an deiz ha koant evel al loar,
 Biskoaz pen-heraz ker koant n'euz bet war ann douar.
 Luguerec a re Breiz-Izel, he diou chod gwen a ruz
 He ginou, vel eur rozen, he bleo, he lagad d'ann liv
 Eur groas aour en he c'heve'hen, he c'hoef dantelezet
 Lavaret vije eun eul euz an en diskenneta

- » O ! pebeus joa evidomp, va c'hloarek Gwenole,
- » En em gaout e Remengol, deiz pardon Mamm Doue,
- » Mamm an oll dud aukeniet, Gwenole, ma mignon,
- » Evidout, e peb amzer, he fediz a galon.

- » — Metik koant, setu aman, setu ar voulen aour,
- » A rosz d'in, arog mervel, Annaik, va mamm baour,
- » Doug auez-hi war da viz, kemer-hi digan-eo,
- » Me dou, war goalen ma mamm, d'az karet da yikeu,
- » — Ar groaz aour zo em e'here'hen a vo did Gwenole,
- » Eur guchen euz va bleo da a roan did ive;
- » War ar groaz se e touan ha dirag ar Werc'hez,
- » E vi karet gant Metik 'tre ma vo e buez.

Ha daoulinet en iliz, hon euz gred hor peden,
Ha roet evit offrans, eur c'houriz kour melen,
Binniget hor medalen, poket d'ar relegou,
Da relegou Sent Breiz, karet gant hon tadou.

Goude hon eus baleet hon daou dre Vreiz-Izel,
Ha gwelet kalz ilizou, kalz a douriou huel,
Abbati Landevennek ha mor Douarnenez,
Lec'h ma oa benzet kear Is hag ar brincez Ahez.

Gwelet hon euz Mene-Hou, hag iliz veur Kemper,
Mene-Bae, iliz Bulat hag hini Landreguer,
Kastel Brest, Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaün ar Foll,
Ha kaëra tour zo er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Ker-Ahez, Kemperie, Pont-n'Abat,
Fouenan, bro ar merc'het koant, Gwengamp hag Huel-
Montroulez ha Lana-lluon, Krozon ha Lez-n'Even, [goad
Kallak, bro ar gourinou, Kastel-Lin, Rosporden.

Clevet on euz o krozañ ar mor e beg ar Ilaz,
Biskoaz den n'hen tremenaz eb santout aon pe c'hlaz ;
Bet omp en enez Sizun, en Heussa, Molenez,
En enez Vaz, er leodet, ive er Seiz-Enez.

Eur blavez omp bet eurus evel daou eal Doue,
E setu lec'h, pa hor gwelet, ann holl a lavare ;
» Setu kloarek ar Rannou, soun evel eun dervon,
» Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rozen.

IV

Devez pardon sant Herbot, e kleviz eur c'helou,
En euz beuzet va c'halon en eur mor a zaëlou ;
Gant he zad ha gant he mamm, d'amm mestrezik Metik,
Ez oa choaet da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan ze oa diot, hep furnez, hep skiant,
Ne gare war ann douar nemet ar gwin-ardant ;
Metik paour, pa e gwele, a grene gant enkreuz ;
Hogen, he zud oa dallet, allas ! gant ann danvez !...

Mont a riz primm d'he gwelet neuze da Gerzanton ;
Dre ma tostaen, em c'hreis e krene va c'halon ;
War dachen ar bourg o sôn e oa ar biniou,
Tud ann eured, ha Metik beuzet en he daelou.

Metik, a dreuz he daëlou, a reaz ouzin eur sel
En eur lavaret : *Kouraj, kouraj, mignon fidel !*
Monet a ra en iliz, lavaret 'ra d'ar belek :
Giceno! eo a garan, hag hen vo va fried !

Koueza raze d'ann douar raktal ar benn-herrez,
Ha douget e oe dioc'h-tu euz ann iliz er mez ;
Dispak he c'hoel, he dillat, ha dispak he bleo ;
Seblantout a re beza eun elik paour maro.

Mantret holl gant ar glac'har e koueziz d'ann daoulin,
En eur grial : « O Metik, sell a dreuz ouzin !... »
Pokat a riz d'he dornik, d'he diou chod, d'he c'herc'hen ;
O Metik ! Metik ! Metik ! te p'hini a garien !...

Ann disesper en dro din, evel eur vantel blom,
A gassaz pell ac'hanon, pell war zu Mene-Hom...
Va skiant a zo kollet, va c'balon a so ien...
O Metik ! Metik ! Metik ! te p'hini a garien !...

Eiz de goude, asezet e kreiz koat ar Rannou,
War va diou chod e rede dion feuteun a zaëlou...
Pa glevis e Remengol o sôn ann anter-noz,
E lavariz esklamet : « Va Doue, deoc'h bennoz.

- O Gwerc'hez vad Remengol, sellit oc'h va glac'har,
- Aman oun deut da vervel brema war ho touar :
- Varc'hoaz, pa zavo ann heol arc'hantet en envo,
- Dindan an derven goz me vo a c'avet maro !!!...

- » O Metik va dousik koant, p'hini a garien,
- » Kenavo lavaran did er bed ma da viken !
- » Gant ar maro unanet, ni e'hoaz en eum garo,
- » Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo !!!... »

V

An de varlerc'h, da zao heol, eun dourzunel hep par
A hirvoude en derven he c'hiemou a c'hlae, har;
Ar c'hloarek a oa maro, maro gant ann auken,
En eur lavaret : *Metik ! te p'hini a garien !*

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas war he vuzellou
Kroas aour ha bleo du Metik, giebiet gant he zaélou,
War ann derven n'doa skrivet hano he garante,
Ha diou halon unanet treuzet gant eur c'hleze...

Kasset eo bed ar c'hloarek da vered Remengol,
Ha sebeliet e disheol iliz sakr *Remed-oll*,
Iliz patronez he vamm en deuz bet ken karet !...
Tud iaouank a Vreis Izel, pedit'vit han bepret.

Setu eta Gwenole en he vele douar !!!...
Eur miz goude eo klevet huanadou glae'har...
Eur plac'hik gwisket e dû, e bered Remengol,
Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hes Remed-oll.

O tremen dre ar vered, velas war eur men be
Skrivet neve flamm hano he mignon Gwenole,
Epad ann noz daoubinet, Metik wele dourek,
Ha d'ar men be e poka, e poka kalonek.

- « O Gwenole, eme-z-i, setu te o repos ;
- » E douar sakr Remengol ez out deut d'ann gortoz,
- » Mes kent ma tarzo ann de, o va muiñ karet !
- » Er be man, dre zorn Doue, ni vezo unanet !!!... »

Da zao-heol, eur belek koz, vont da bedi Doue,
He c'havas anter-varo, gourveet war ar men be ;
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolven ha pardon :
Metik a varvas laouen, raktal, gant rann-galon !...

Enn eur vogeden ezauz ene gwen Metik kez,
'Vel eur goulmik, a nijaz d'ann en gant ann elez ;
Eur a varados Doue eur goabren arc'hantet,
War tour iliz Remengol, neuze zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hez ha Sent koz Breiz-Izel,
'Deuz kurunet Gwenole hag he vestrez santel;
Barzet ann agizer gwechall, drañt, war ho zeleanou
Da Zoue, e Brezouek, a gane ho gwersiou.

Sebeliet e korf Metik, kichen korf Gwenole,
Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant egile...
Eur c'hloarek karantezuz 'n deuz war ho be skrivet
Ar c'homzou truezus mañ, gant he zañlou mesket:

- *Amañ e repos peoc'h, kloarek koal ar Rannou,*
- *Dea freiz hag a galon, den a garie he vro*
- *En e gichen eo kousket penn-heres Kersanton,*
- *Metik, ann elik Done, maro gant rann-galon !!!*

O Werc'hez vad Remengol, setu o faon vuguel
Kousket e tal hoc'h iliz ha didan hoc'h askel;
'Vel eur vamin garantezuz war gavel he mabik,
C'honi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleier, ograou Remengol, truezuz c'hui zono;
Barzet ha pelerinet, zañlou c'hui a skuillo,
War ke Metik, Gwenole, pa rafet ho peden,
Eur beden a garantez ha karget a saken !!!

Bevit e doujaus Done, tud yaouank Breiz-Izel,
Pedit Werc'hez Remengol evit ma viot zantel;
Sonjit ive e Metik, sonjite Gwenole,
Bezit evel d'ho fidel ann eil d'egile.

Koal ar Rannou (Rann, Rannou chants, séries), *bois des chants ou des séries*, Koal braz e dero, a zo e kichen ha dar zao-heol da iliz Remengol. Anna Drouizet, beleien ar Vretonnet, gwechal c'hoas difeiz, a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou eul louzaouen, hañvet *huel-var*, p'hini a zao war ann dero.

Barz, barzet (barje, poëte). Bep bloaz ive en om gave e koat ar Rannou hag e *Rumengoulou*, hirio hañvet Remengol, Barzet ann Arvor. Ar re ma a oa tud a skiant pere a gane gwervion great gant ho, war ann traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meulandi Teutates, doue faoz, p'hini a oa enoret el leac'h e ma brema iliz Remengol. D'ann hini vije hañvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, war p'hini ar Barz a gane he soniou.

Gwenkian, Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent m'a teuaz en-hi ar feiz kristen. — Brema zo e'hoaz e Breiz kals Barzet, pere laka o studi hag o soan evit kenderc'hel en hon touez ar feiz t'ia i z hor bro. Er pen kenta eoz ar barzet e ma an aoutronez Kernake, barz Breiz; ann abad Herri, barz ann Aviel; Troude, barz ar vugaligou; Keniar, person ha barz sant Laurans; ar Iann, barz Koat-ann-Not; Mihan, barz Laouenan Breiz Rannou, barz Roe'h-Alfaz; Jodbiou, vikel vras a eskopti Gwenet, barz sant Gwen-Evel; ann abad Klec'h, barz Rungolven; Kaourietin Thomas, barz an Tour-Tan; Prosper Proux, barz Kernou; ann Hegarad, barz Plouek; I.-P.-M. ar Skour, barz Itron-Varia Remengol; F.-M. ann Huel, barz Ker-ar-Born; Olier Souvistre, barz Plouihan; ann abad Poullaouek, kure Landevenek, barz sant Gwenole; Karis, person Plougras, barz sene Bre; Guernisson, barz Keravel, ha calz a re all, pere o deuz gret eun niver bras a wersiou ha soniou kaer.

- « Kanit anez ho Breiziz, rag beza int gwerziou.
- » Gret gant skian ha gant gwel vad komzou.
- » Gret int e brezounek mad, nan e koz vrezounek,
- » Evel ar re zo kalz re e brezounek-gallek. »

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santel,
 Kanit gloar ha meuleudi da Vamm tud Breiz-Izel,
 Ho Mamm hag o Patrones, Rouanez ar bed oll,
 Mamm ann dud paour ankeniet, *Gwerc'hez vad Remengol.*

I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

PROPRIÉTÉ DE L'AUTEUR

I.-P.-M. AR SKOUR

Paris chez M. le Libraire

Paris chez M. le Libraire

ANN HINI A GARAN

War eun ton neve.

Ann hini a garan 'zo koant evel ann heol,
Karantezuz evel Gwerc'hez vad Remengol.
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'an hini a garan, roit bepret ho penoz.

Ann hini a garan 'zo dous evel al loar,
En noz pas sklerijen bugale ann donar,
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo vel ann alc'houeder,
D'am c'halon paour e kan soniou, gwerziou tener.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo 'vel ann durzunel,
Pa ve maro e far, en em doll da vervel.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo eun elik Doue,
Eun elik dous a ra joastet va bue.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan a zo dous he haou,
Evel ar mel eo mad, koant evel a bleunio.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan em c'halon a chomo,
Tre ma vin e bue, ha goude va maro.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan gane-me en disheol,
A reposo eun deiz er bered Remengol.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, e palès ann Drindet,
Gane-me da viken a vo karet, karet.
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'ann hini a garan, roit bepret ho penoz.

I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

Lann-Huon, en ti an intanvez Ar Goffic, levrer.

